

KANNADIG

Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg

N.11



PIV zo a-du da gemer
perzh er strolladù-
labour a studio :

1.- PENAOSEVEL UR GENSTRIVADEG
BREZHONEG ER SKOLICU er bloaz
a zeu ?

Gant Daniel CARRE, Kalan,
BREC'H 56400 AN ALRAE ;
pellg.: 97.57.67.71 .

2.- PESEURT FILM VIDEO A VO SAVET
GANT AN UNVANIEZH HAG EVIT
TIZHOUT PIV (bugale, kren-
narded, kerent) ?

Gant Yann-Youenn LAGADEG, 4,
straed Rouergue 29200 BREST ;
pellg.: 98.47.45.80 .

3.- PESEURT ABADENNOU SKINWEL
PEDAGOGEL a vo kinniget sevel
da F.R.3 Roazon ?

Gant Tugdual KALVEZ, Ar Gre-
c'henn Avel 56250 SENOLF ;
pellg.: 97.45.45.17 .



Kenlabourit, kasit menozioù !

KERZU I 986

Dont a ra er-maez^{an} niverenn-mañ eus hor
C'hannadig gant un tamm mat a zale, en abeg
d'an diaesterioù micher o deus bet ar re a
ra war e dro . Digarezit ac'hanomp, mar plij
ganeoc'h .



ADREIN LANS D' HOR STOURM

A bep seurt kudennoù boaz pe nevez a sav
e pep lec'h :

- nebeutoc'h a argant zo bet roet d'ar c'he-
vredigezhioù sevenadurel gant ar Stad er
bloaz-mañ (netra evit hon hini) ;

- diaesterioù a vez graet da gelenn ar bre-
zhoneg un tammig e pep lec'h, dreist-holl e
Bro Naoned, e korn-bro Pariz, er skolioù
prevez ;

- tri fost CAPES brezhoneg hepken, pa 'z eo
bet kresket niver ar postoù evit an holl
danvezioù all ;

- an trede yezh zo atav en arvar, hag all ...

Hep dale e vo kaset ul "LIZHER DIGOR " d'an
Ao.Ao. Chirac ha Monory, evit klask lakaat ar
gouarnamant da cheñch politikerezh hag ar Vre-

toned _ dilennidi ha stourmerien _ da bouezañ warno .

Kemerit perzh c'hwi ivez er stourm !

T.K.



TRAKTOU BRUDEREZH

Evit ma c'hellfec'h ober bruderezh evit ar brezhoneg en deska-
durezh e vo adembannet ganeomp hep dale 20.000 skwerenn eus an trakt
melen da roñ d'ar gerent ha d'ar solidi (5.000 ouzhpenn eget ar
bloaz paseet) .

Kit e darempred gant renerien ar skolioù zo en ho korn-bro ha kemerit perzh er bo-
dadegoù kelaouiñ a vez graet ganto evit ar vugale a cheñcho live klas er bloaz a zeu
(CM → 6vet live ; 5e → 4e live ; 3e → 2e live) .

E derou miz Genver 1987 e vo kaset ur pakad traktoù d'an dud a gavi o anv amañ
dindan, dezho da ingalañ anezho etre ar stourmerien zo o chom er c'horn-bro .

- | | |
|-------------------------------------|---|
| 22 BRO SANT-BRIEG | = Garmenig Ihuelou-Ar Menn, 6, straed Lopicque _ 22000 SANT-BRIEG |
| BRO DREGER | = Jef Philippe, Koad ar Roc'h Bihan, Koadout _ 22200 GWENGAMP |
| BRO LOUDIEG | = Yann-Dominig Robin, 7, straed Pasteur _ 22600 LOUDIEG |
| 29 BRO GERNEV IZEL | = Padrig An Habask, hent Kerdroniou Vihan _ 29000 KEMPER |
| BRO GERNEV UHEL | = Erwan Evenou, Kerozeg _ 56320 Ar Faoued |
| BRO LEON | = Mikael Madeg, Keredol, Sant-Tonan _ 29220 LANDERNE |
| 35 BRO ROAZON | = Mark Kerrain, 50, ar Mailh _ 35000 ROAZON |
| BRO SANT-MALO | = Yann-Glaod Morvan, 34, straed La Théaudais _ 35780 LA RICHARDAIS |
| BRO REDON | = Emile Grandville, La Marionnette _ 35600 REDON |
| 44 BRO NAONED | = Roland Mogn, 5, straed Martinière _ 44300 NAONED |
| BRO WENRANN | = Laorañs Motrot, 29, allée des Pingouins, Kerlede _ 44600 St-NAZER |
| 56 Bro WENED IZEL | = Aline Vorc'h, 10, straed ar 62e R.I. _ 56100 AN ORIENT |
| BROWENED UHEL | = Tugdual Kalvez, Ar Grec'henn Avel _ 56250 SENOLF |
| BRO BONDI | = Jorj Belz, 3, straed Iena _ 56300 PONDY |
| BRO BLOERMEL | = Gweltaz Ar Bihan, 32, straed an 8 a viz Mae _ 56800 PLOERMEL |
| 53 MAYENNE + NOR-
MANDIE + ANJOU | = Lukian Tangi, 44, straed Péanne _ 53000 LAVAL |
| 75 BRO BARIZ | = Ronan TREMEL, 13 bis, rue Garibaldi _ 93400 St-OUEN |

UNVANIEZH AR GELENNERIEN BREZHONEG (U.G.B.) _ " An Douarenn ", 21, straed an Tier-
barn _ 56000 GWENED .

SKODENN = adalek 50 lur ; da baeañ d'hon teizorer : Mark KERRAIN, 50, ar Mailh _ 35000
Roazon .

Kasit deomp pennadoù, fichenoù pedagogel, keleier eus stad ar brezhoneg en ho skol pe
en ho pro . Trugarez deoc'h en a-raok !

Enseignement

« École-Breton-Métier »

**Une originalité
du LEP Marie Le Franc**

Le LEP Marie Le Franc a la particularité d'être le seul établissement scolaire du Morbihan, voire de Bretagne, à poursuivre l'enseignement de la langue bretonne et de la civilisation régionale selon les critères définis par M. Savary en 1982.

Le point devait être fait officiellement en 1984, mais tel ne fut pas le cas.

Les deux enseignants lorientais engagés dans l'opération « Breizh-Skol-Micher », Mikael Floc'h et Kirill Giraudon, ont ainsi éprouvé le besoin de situer eux-mêmes leur action vis à vis des autres

professeurs de LEP susceptibles de travailler dans le même sens.

Ils ont organisé samedi matin dans l'établissement lorientais une rencontre autour d'une exposition réalisée par les élèves des cours de breton du lycée.

Une quinzaine d'enseignants sont venus leur apporter leur soutien, les échos les plus favorables, dans le Morbihan, venant de Locminé et de Pontivy. Dans les Côtes-du-Nord, Rostrenen et Guingamp sont en pointe. Au LEP Marie le Franc, les élèves ont une heure de breton et d'étude de la civilisation régionale obligatoire par semaine, lors de leur première année de scolarisation ; les années suivantes, ces cours sont facultatifs.

Les enseignants ont essayé de lier cet enseignement à la formation technique dispensée dans l'établissement ; ce fut notamment une réussite l'an dernier dans le domaine de l'habillement. Cette année le thème choisi est le conte... Une journée sera consacrée au



La visite de l'exposition.

conte breton après la Toussaint. Mikael Floc'h et Giraudon souhaiteraient créer un groupe de secteur afin de définir en commun un produit pédagogique susceptible, non seulement d'intéresser les élèves, mais encore s'incorporant le mieux possible à leur formation générale.

Ce n'est pas chose facile,

car les textes ont délibérément délaissé le breton comme option dans les examens de BEP et de CAP.

Les deux enseignants ont rendu hommage hier à Sten Normand, professeur de dessin, décédé il y a trois ans, qui donna l'impulsion à cette expérience particulière au LEP Marie Le Franc.

Savet e vo gant Mikael Floc'h ha Kirill Jiraodon ur strollad studi (" groupe de secteur ") diwar-benn al liseoù micherel . Ar re a vefe dedennet gant al labour-se n'o do nemet leuniañ ha kas en-dro dezho ar fichenn a vo kavet war ar bajenn amañ war-lerc'h .

-§-

HO YEC'HED

Resevet hon eus niverenn III S., Du-Kerzu 1986, eus ar gelaouenn : "Actualité de la médecine officielle et naturelle" Evit ar re dedennet B.P. 80 - 02202 Soissons Cedex . Koumanant 95 L.

Enseignement des langues : l'anglais d'abord

Pas de surprise. Ils sont 4 594 000 élèves du second degré à choisir l'anglais en première langue. Pour l'allemand, les amateurs (1 261 000) se raréfient : 12,5 % en 1985, 14 % en 1983, 21 % en 1958. L'espagnol rallie 1 037 000 collégiens, l'italien 159 000, le russe 26 000. Le portugais, l'arabe, l'hébreu, le chinois, le grec moderne (depuis cette année) se partagent les faveurs d'environ 30 000 élèves.

La proportion de jeunes étudiant une seconde langue vivante - proposée en option en 4^e ou 2^e - s'accroît pour dépasser 60 %.

Le latin n'est pas tout à fait mort : 353 400 élèves continuent de décliner « rosa, rosas, rosae ». On compte encore 22 800 hellénistes, beaucoup plus que de bretonnants (1 800). En effet, depuis 1982, huit langues régionales peuvent faire l'objet d'épreuves à option au bac : outre le bre-

ton, le basque, le catalan, l'occitan, le corse, l'alsacien, le béarnais et le flamand.

DOIT-ON ÉCRIRE LORIENT OU L'ORIENT comme au temps de la Compagnie des Indes ? La question est posée par Bernard Jacquemin qui propose de créer une association pour le rétablissement de l'apostrophe. Les bretonnants n'ont pas ce souci, ils ont toujours dit : « An Oriant ».

Mikael Floch - Kirill Giraudeau
 Kelennerien war ar Brezhoneg
 L.P. Marie - Le - France
 56 100 - An ORIENT
 d'ar 15 a vis HERE 86

Keneil k̄er

C'hoant hon eus sevel ur rummad pedagogel diwar-benn : " yezhoù ha sevenadur Breizh e Lise-Micher " war dachenn an Akademiek.

Asot ez eus bet un devezh bihan amañ ar sadorn 24 a vis gwevangalo - Setu ur pennad-kazetenn oc'h ober meneg anezhañ -

Perak ur rummad pedagogel ?

- * Da gentañ, ezoump bras a zo eus ul liamm etre "kelennerien war dañvez Breizh" e Liseoù-micher (peogwir ez eus frammoù evid rummadoù ar sort-se ben deskadurel ofisiel)
 - * Evid labouad war dachenn pedagogel (ezoump doareoù-ober ha skiant-prenet h. a...)
 - * Hag evid pouezañ muioc'h da lakead an dañvez-se e-barzh an ardoennoù CAP ha BEP.
- Piur a c'hall dont e-barzh ?
- * Ar gelennerien brezhoneg pe gallo (o labouad warni er bloaz-mañ, haun pe daun)
 - * Ar gelennerien dedennet gant reiñ plas da dañvez Breizh er o chelevenadurel.

Nall zo warnomp da sevel ar rummad-se rak red eo goulet aotre ar Rektor e peun ar bloaz - Part p'h a-du distagit an tamm paper-respout ha kas anezhañ deomp dioustu, mar plij !
 A wir galos -

Respout da gas en-dro un abretañ ar gwellañ

Ano :
 Chomlekch - labour :
 Kelenner war :
 C'hoant im eus kener perzh er rummad pedagogel "L.P. — yezhoù ha sevenadur Breizh"
 Sin :

Ar bodadegoù

* peseurt devezh a garfec'h gwell ?

al lun	
ar meurzh	
ar merc'h	
ar yaou	
ar gouere	
ar sadorn	
ar sul	

da ruzin goude breizhiek d'abardaez

* pegeit e padfe ur vodadeg ?
 (3 eur da nebeutañ)

* ped bodadeg bep bloaz ?
 (unan bep miz e vefe mad)

* Evezhiadennoù =

C'EST CHOUETTE DE PARLER BRETON!

teuliad

STOURM & BRO BARIZ

A.P.L.B.
46 06 89 67

COURS GRATUITS OUVERTS A TOUS

UNVANIEZH AR GELENNERIEN BREZHONEG. 21, stread en Tier-Barr - 98000 GWENED

A.P.L.B., ASSOCIATION DES PROFESSEURS DE LANGUE BRETONNE,
13 bis, r. Garibaldi, 93400 Saint-Ouen. 46 06 89 67 - 43 02 27 98

gant Ronan TREMEL

Adkroget eo bet ar skol vrezhoneg war :

- Akademiezh Versailles (Massy-91, Plaisir-78, Enghien-95, Nanterre-92). Evit Enghien, hon eus goulennet didoubliñ ar c'hlas (80 skoliad!), met ar rener, ar rektorelezh zo a-enep daoust d'ar ministrerezh bezañ (bet?) a-du . Klask a reomp digeriñ ur c'hlas nevez e kêr Versailles .
- Aka demiezh Creteil : lise Villemombre-93, e lise Vincennes ez eus

skolidi enskrivet, met aotre ebet betek-hen .

- Akademiezh Pariz, e-lec'h ma ran _ ma raen_ skol gant ur servij klok . Met n'em eus ket bet an aotre c'hoazh da gregiñ daou viz goude an adkrog-skol ! Er sizhun-mañ e vo divizet gant hor c'hevredigezh kregiñ kentelioù-stourm e gar Montparnasse pe aloubiñ ul lec'h ben-nak, ma n'eus respont mat ebet .


A-hend-all, warlene gant ar vachelouriezh (miz Mae-Mezheven 86) hon eus bet div wech muioc'h a arnodennidi (48 — 102) .

Prestik e vo aozet ur staj ganimp e Pariz evit 15 pe 20 derabued .

Bez' e ran ur staj (etrevroadel) e Brusel ivez (eil live, 7 den, 5 kumuniezh) : miz Du 86 .

15.000 trakt " C'est chouette de parler breton " hon eus tennet .

Setu e berr-berr gomzoù penaos emañ kont ganimp amañ .



Petra nevez abaoe lizher Ronan Tremel ?

Div wech o deus graet stourmerien Pariz ur gentel brezhoneg e ti-gar Montparnasse ha kaset o deus al lizher a gavoc'h amañ war-lerc'h da Rektorezh Akademiezh Pariz . D'o deus ket gounezet c'hoazh, met ijin, kalon ha youl o deus : perzh an drec'herien!

Langue bretonne
Un cours sauvage à Montparnasse !

VANNES. - Certains usagers de la gare Montparnasse ont ouvert des yeux ronds vendredi 28 novembre, à 18 h. L'Association des professeurs de langue bretonne y avaient organisé un cours sauvage pour souligner les difficultés d'existence de leur langue sur l'académie de Paris. Leur tract annonce " C'est chouette de parler breton ", était original : il présentait une page du premier manuscrit breton-latin datant des environs de l'an 780. Une autre feuille donnait les adresses des 12 cours gratuits de breton existant sur paris et banlieue.

17/11/86 - 170

K.B.D.P.
Kelennerien war ar brezhoneg
en deskadurezh publik

A.P.L.B.
Association des professeurs
de langue bretonne

R. TREMEL
 Adjoint d'enseignement de BRETON

Lundi 8 décembre 1986

Objet : Demande de rendez-vous

Mme AHRWEILER,
 Recteur de l'Académie de Paris
 47, rue des Ecoles
 PARIS

Madame le Recteur,

J'ai l'honneur de solliciter de votre bienveillance un entretien afin de traiter du problème de l'enseignement de la langue bretonne sur l'Académie de Paris.

L'urgence de ma requête se justifie par votre télégramme en date du 5/12/1986, qui m'intime l'ordre d'enseigner l'anglais à raison de 5 heures hebdomadaires au lycée Rodin (copie ci-jointe).

Il me paraît nécessaire de vous informer personnellement et au plus tôt de la situation.

Je justifie brièvement ma démarche :

J'enseigne la langue bretonne sur votre académie depuis 1976 (voir la circulaire n° 76-123), assume un service à temps plein de breton depuis plusieurs années.

Je dénonce depuis plusieurs années les pressions dont je suis l'objet et dont les élèves font les frais : il est impossible d'organiser avec sérénité un enseignement du breton dans les lycées et collèges de Paris.

Le Rectorat de Paris (services de la Rue Curial, Paris 19^e) entrave l'enseignement des langues des peuples de France : ainsi le basque, le catalan, l'occitan, le corse ont été éliminés l'an dernier.

En ce qui concerne la langue bretonne, vous noterez la liste des pressions rectorales :

- paiement à mi-salaire d'un service à temps plein, et ce pendant 2 ans (dettes payées ultérieurement par vos services);
- mutation sur l'académie de Versailles pour enseigner une autre matière (refus de ma part, réintégration à Paris, 2 mois de retard, perte d'effectifs);
- nomination sur un lycée de maçonnerie, pour enseigner l'anglais (refus de ma part, réintégration au lycée Voltaire au bout de 2 mois 1/2...)
- nomination à cette rentrée sur un poste de sciences physiques à Paris, interdiction d'informer les élèves parisiens sur la "possibilité" d'étudier le breton (actuellement 3 mois de retard, désorganisation de l'enseignement, mensonges et trucages de vos services...).

K.B.D.P. / A.P.L.B.

Président : Roman Tremel, 13 bis, rue Garibaldi, 93400 Saint-Ouen - 46 06 89 67
Sekretourez : Mai Dupuy, 7 allée des Maisonnettes, 93220 Gagny - 43 02 27 98
Telzorer : Dominig Cotel, 4, allée Beethoven, 95100 Argenteuil - 34 10 50 99

Madame le Recteur, il est amer et dérisoire de constater cette volonté rectorale de "casser" le peu qui existait, ce peu que nous considérons toutefois comme une liberté, un droit.

Nous avions pris nos dispositions cet été en négociant avec le ministère de l'Education nationale les conditions d'une reprise normale des cours à Paris et en banlieue.

Vous trouverez ci-joint copie d'un courrier que notre Association a reçu. M. Vinciguerra, chargé de mission responsable des "langues régionales", nous assurait le 10 septembre 1986, que :

"Pour la rentrée 1986/1987 (...), les mesures sont déjà prises afin de reconduire celles de l'année scolaire précédente."

Sur les deux autres Académies d'Ile-de-France, la rentrée s'est déroulée à peu près bien. Seul, le Rectorat de Paris - ignorant, paraît-il, l'existence de ce courrier ministériel - s'est appliqué à empêcher et empêche toujours une reprise généralisée des cours.

Les membres de notre Association, les élèves, les étudiants, les parents d'élèves sont indignés.

Vendredi 12 décembre, à 18 heures, ils organisent un rassemblement de protestation qui prendra la forme d'un cours sauvage de breton dans la gare Montparnasse.

Je crois aussi, comme tout observateur impartial, que ces 3 mois de retard et d'interdiction de cours sont injustifiables.

Permettez-moi de formuler avec empressement le vœu que vous acceptiez de recevoir une délégation de notre Association.

Donc, plutôt que d'avoir à faire face à des mesures d'intimidation, nous souhaitons vivement que :

- a) des moyens soient accordés afin de tenter de réparer le tort considérable qui est porté à mon encontre et à celui des personnes qui étudiaient ou veulent étudier le breton ;
- b) des perspectives claires soient établies pour l'avenir de l'enseignement de la langue bretonne dans le service public à Paris.

Je vous prie d'agréer, Madame le Recteur, l'expression de mes sentiments les plus distingués.

Le breton - interdit - dans les lycées de Paris : cours sauvage à Montparnasse

VANNES - Les démarches entreprises pour rétablir les cours de breton sur l'académie de Paris, depuis septembre, sont restées vaines jusqu'à présent. Le professeur Roman Tremel avait déjà dû se battre l'an dernier pour retrouver sa place - on l'avait nommé professeur d'anglais. Cette année, on lui demande d'enseigner la physique. Les Bretons de Paris ont déjà organisé un cours sauvage à la

gare Montparnasse en novembre. Ils remettront ce 12 décembre, à 18 h, au départ des grandes lignes.

Les Bretons dénoncent les « négligences calculées » du rectorat de Paris qui ont déjà abouti à la disparition des cours de basque, de catalan, d'occitan et de corse sur la capitale, tandis que les deux autres académies d'Ile de France acceptent mieux les langues régionales -

Roman TREMEL

46/42/1986 06

ELEVES - ETUDIANTS - ENSEIGNANTS - AMIS DE LA BRETAGNE

VENDREDI 12 DÉCEMBRE

PROTESTONS

CONTRE

**L'INTERDICTION
DES COURS
DE BRETON**



DANS LES LYCÉES (Paris - Banlieue)

**COURS SAUVAGE
DE BRETON**

**à la gare Montparnasse
18^H accès Départ grandes lignes**

- **POUR UNE REPRISE IMMÉDIATE DE
TOUS LES ENSEIGNEMENTS !**
- **POUR LA TITULARISATION EN BRETON
DES PROPS !**
- **POUR UN DEUG DE BRETON !**

A.P.L.B.
K.S.B.

STOURMOMP BETEK AN TREC'H !

UNVANIEZH AR GELENNERIEN BREZHONEG. 21, strada an Tier-Barn - 58000 GWENED

A.P.L.B., ASSOCIATION DES PROFESSEURS DE LANGUE BRETONNE,
13 bis, r. Garibaldi, 93400 Saint-Ouen. 46 06 89 67 - 43 02 27 98

**Kelennerien war ar brezhoneg
en deskadurezh publik**

**Association des professeurs
de langue bretonne**

13 bis rue Garibaldi, 93400 Saint-Ouen - 46 06 89 67 - 43 02 27 98

**LA LANGUE BRETONNE VIVRA ! BEVAN A RAO AR BREZHONEG !
NON A SON ELIMINATION DE L'ENSEIGNEMENT PUBLIC PAR LE RECTORAT DE PARIS !**

"LA LANGUE BRETONNE EST ASSASSINÉE" (F. MITTERRAND). La langue bretonne meurt tous les jours. Et l'Administration française mène sans tressaillir ni douter son travail de fossoyeur.

Loïn d'être LANGUE OFFICIELLE EN BRETAGNE, le breton est toujours indigne de respect, meurtri, écrasé, programmé vers le point zéro de son anéantissement (et ce malgré la concession de quelques mesures qui ne lui permettront jamais de prétendre être une langue à part entière et égale en Bretagne).

AUCUNE LOI ne reconnaît le breton ni les autres langues des peuples de France.

BREZHONEG : WAR-SAV ! LANGUE BRETONNE : MOBILISATION !

3 500 000 Bretons en Bretagne; 1 000 000 en Région Parisienne. L'enseignement du breton, théoriquement possible, est-il encore aujourd'hui condamné à disparaître ?

EXEMPLE CONCRET : L'ENSEIGNEMENT DU BRETON SUR L'ACADEMIE DE PARIS

Créés en 1976, les cours de langue bretonne existaient sur 3-4 établissements secondaires parisiens et correspondaient depuis des années à un emploi à temps plein de breton.

Rentrée 1986-1987 : Deux mois et demi après la rentrée scolaire, les cours sont toujours interdits. L'an dernier, la reprise fut sabotée également par le Rectorat de Paris (plus de 2 mois de retard). Précédemment, le seul enseignant de breton était muté sur une autre académie. Précédemment encore, il fut mis à mi-salaire pendant 2 ans pour le forcer à démissionner.

En 1981, le Basque, le Breton, le Catalan, le Corse, l'Occitan étaient enseignés sur Paris. Depuis ces langues de France ont été liquidées. Le Breton résiste.

Sachez que pendant des années, l'enseignant (R. Tremel) a été classé par le Rectorat enseignant d'arménien, puis titularisé en anglais et nommé à cette rentrée sur un poste de sciences physiques... bien qu'il n'ait jamais enseigné aucune autre matière que le Breton !

M. Allaire, du Rectorat de Paris, qui se prétend d'attache bretonne (par on ne sait quel bout de ficelle), a programmé l'élimination de la langue bretonne en proposant un retour à la situation de 1978 (6 h au lieu des 18 h, ce qui était déjà manifestement insuffisants, puisqu'il faudrait sur l'Académie de Paris 3 enseignants de breton, donc plus de 50 h !)

CONCLUSION DES ELEVES, PARENTS D'ELEVES ET DES ENSEIGNANTS : s'il est interdit d'enseigner le Breton dans les lycées, **LES COURS AURONT LIEU DANS LA RUE !**

A NOTER : 1. Malgré le mépris et l'intolérance qui règnent dans certains secteurs de l'Education nationale, le nombre de candidats de Breton au baccalauréat a doublé à la session de juin 1986 en Ile-de-France.

2. Dans certains lycées de banlieue, une atmosphère plus détendue permet d'avoir des classes de 30 à 80 élèves en Breton. (Mais le proviseur du lycée d'Enghien refuse les crédits qui permettraient de doubler la classe de 80 élèves de Breton...).

**IMPOSEZ VOTRE SOLIDARITE A L'ENTREPRISE D'ELIMINATION
DE LA LANGUE BRETONNE DE L'ENSEIGNEMENT PUBLIC A PARIS !**

APPRENEZ LE BRETON VOUS AUSSI ! DESKIT BREZHONEG C'HWI IVEZ !

VENDREDI 28 NOVEMBRE 1986, 18 H

**COURS SAUVAGE DE BRETON A LA GARE MONTPARNASSE
(ACCES DEPART GRANDES LIGNES)**



COLLOQUE

Langues et cultures régionales

"L'enseignement Public", Novembre 1986

*Déjà engagé dans certaines régions
le débat sur les cultures et langues régionales va s'amplifier dans les prochaines semaines
pour aboutir à la tenue d'un colloque national les 16 et 17 janvier 1987 (1)*

Ce n'est pas la première fois que notre fédération se penche sur ce dossier important et complexe. Les précédents congrès de la FEN l'avaient déjà traité. Notre projet éducatif présentait à la fois des orientations nouvelles et proposait des changements dont certains ont été d'ailleurs pris en compte au fil des années.

Ce sont ceux relatifs, en particulier, aux horaires spécifiques, à la possibilité de choix optionnel, au développement des formations dans l'enseignement supérieur et pour les futurs enseignants, et à l'aide apportée par des conseillers pédagogiques ou des maîtres itinérants (2).

Aujourd'hui, il faut aller plus loin, faire évoluer notre « projet éducatif » montrer les insuffisances du dispositif actuel, valoriser notamment les aspects culturels et inciter les grands moyens d'information à s'y intéresser en permanence.

Quatre grandes catégories de réflexion doivent être plus particulièrement retenues :

La langue régionale

(Sa place dans le système éducatif, les problèmes de formation des personnels, de contrôle, d'évaluation... de l'existence d'écoles privées, etc.).

La culture régionale et son patrimoine

(Modes d'expression de la culture populaire, ses vecteurs, le rôle des médias et des associations concernées...).

Les rapports langues et cultures régionales et la vie internationale

(Échanges industriels, commerciaux, culturels, relation avec les régions de différents pays.)

Unité nationale et diversité régionale

Compte tenu de la décentralisation, évolution et changements, etc.

Mais au-delà de ces thèmes qui doivent permettre de cadrer, d'ordonner notre réflexion commune, c'est bien le développement, la prise en compte dans notre organisation de nouveaux types de relations entre les idées, les formes de culture dans une société qui est, de fait, interculturelle.

Ce n'est sans doute pas le moindre des paradoxes que d'appeler à ce que notre société soit ouverte, accueillante, pluriculturelle par exemple pour les enfants de migrants et oublier que la même prise en compte, le même rayonnement des cultures spécifiques des régions est nécessaire dans le système éducatif et dans la vie culturelle et sociale de notre pays !

Mais chacun sait bien aussi que le débat peut s'engager de multiples manières, polémique ne retenant que le poids de l'histoire, scientifique ne présentant que ses aspects linguistiques ou ne faisant place qu'à la langue comme objet d'études et de recherche ou encore institutionnelle en ne posant que la question du statut juridique des régions.

Tous ces éléments sont évidemment présents dans la réflexion, mais ils ne doivent pas masquer nos objectifs de faire œuvre commune, accessible à tous et traçant des orientations pour l'ensemble de la communauté sociale pour maintenant et pour demain.

La dimension internationale est importante, avec la création de l'Europe et son extension qui fait que des langues régionales représentent une chance certaine d'ouverture intellectuelle, économique et sociale.

Certaines langues régionales ont une carte essentielle à jouer, à la fois pour le développement européen, mais aussi pour leur propre rayonnement et influence.

Gageons que les discussions, tant au sein des sections départementales que des syndicats nationaux, ne laisseront dans l'ombre aucun de ces problèmes avec sérénité et en prépareront l'avenir.

□ Alain MOUCHOUX

1 - Des colloques se sont déjà tenus à l'île de la Réunion, à Perpignan. Les prochains sont programmés à Nancy, en Avignon, à Amiens, en Guadeloupe, Martinique et Guyane. D'autres sont prévus à Toulouse, Clermont-Ferrand, en région parisienne, dans l'Ouest, en Corse.

2 - Voir Fen-Hebdo n° 194.

Des textes utiles :

La partie de la motion du Congrès de Lille consacrée aux langues et cultures régionales.

Les articles de l'EP mai et octobre 1986.

Les articles parus dans Fen-Hebdo n° 192, 193, 194, 195, 196, 197, 198, 206.

Collèges, lycées

290 000 enseignants en l'an 2000

Le ministère de l'Education nationale a chiffré ses objectifs en ce qui concerne le personnel du second degré (collèges et lycées) pour l'an 2000. Les 290 000 enseignants (ils sont 250 000 aujourd'hui) seront en grande majorité des certifiés (70 % contre 48 % en 86) et le nombre d'agréés

sera nettement plus élevé (15 % contre 8 %). Les 15 % restants seront des PEGC (11 % contre 30 % actuellement), ou des maîtres auxiliaires ou adjoints d'enseignement (4 % contre 14 %).

Pour arriver à ce résultat, le ministère compte sur l'effet de différentes mesures déjà pri-

ses, notamment la fin du recrutement des professeurs d'enseignement général de collège (PEGC) dont on espère qu'un grand nombre deviendra certifié. Ils sont effect environ 30 000 PEGC licenciés qui peuvent se présenter au concours interne du CAPES. Le nombre de postes offerts à l'agrégation et au CAPES devrait également augmenter (10 000 par an).

Présentant cet « état des lieux » et ces perspectives, M. Guy Bourgeois, directeur adjoint du cabinet de M. Monory, a également confirmé que sera appliqué plus largement le principe de la bivalence des certifiés. Pour l'instant, ne seront concernés que les enseignements des langues autres que l'anglais ou l'espagnol. Dès cette année, un certain nombre de postes sera proposé en lettres-langue vivante dans certains établissements. La bivalence permettrait d'éviter la suppression de l'enseignement des langues rares là où les élèves sont en nombre insuffisant.

En effet, alors que 85 % des élèves choisissent l'anglais en première langue, et que l'espagnol progresse, les autres langues attirent de moins en moins d'élèves. Ils étaient 12,5 % en 85 à choisir l'allemand en première langue contre 21 % en 58-59. 26 000 collégiens seulement apprennent le russe et 30 000 se partagent entre le portugais, l'arabe, le chinois et d'autres langues encore plus rares.

US. m. 148-LANGUES 43/11/86

VERS UN RASSEMBLEMENT "NATIONAL"

Décidément, rien ne s'arrange pour les langues, bien au contraire. Les nouveaux projets concernant les lycées (voir par ailleurs dans ce numéro) reviennent en fait à rendre très difficile, voire à empêcher, le choix d'une troisième langue vivante. La section trilingue deviendra alors, dans le meilleur des cas, une section avec deux langues vivantes et une langue ancienne. Une telle formation présente un intérêt évident pour de nombreux jeunes mais elle ne fait plus de place à la langue III. Or, personne n'ignore aujourd'hui que pour beaucoup de langues, l'italien et le russe en particulier, plus du tiers de l'enseignement dispensé l'est en langue III. Supprimer les options de langue III, c'est

donc à terme faire disparaître pratiquement l'enseignement de ces langues. Plus que jamais, l'intervention des personnels s'impose. Il faut dès maintenant se préparer à une action très ferme. Dès que les projets seront diffusés dans les établissements, il faudra intervenir de toutes les manières possibles. Le 23 novembre, nous aurons une occasion supplémentaire de faire connaître notre point de vue. Enfin, le colloque déjà annoncé (voir U.S. n° 147) aura lieu les 10 et 11 janvier 1987. Il sera l'occasion d'un grand rassemblement national des professeurs de langues vivantes pour la défense de leur enseignement, rassemblement que les premières actions suggérées plus haut contribueront à préparer. **LOUIS WEBER**

ennet e vovamañ a-rack ur bajenn tennet eus kelaouenn an F.E.N. " L'enseignement public ", eus miz Du 1986, a gemenn e vo ur " c'hollok c'hwec'hkognek " e kreiz miz Genver 1987 diwar-benn " ar yezhoù rannvro " .

Fentus a-walc'h eo gwelout ar S.N.E.S. ober goap eus an F.E.N., o vezañ emañ unan eus ar sindikadoù bodet enni, ha pa ouezer ar pezh zo bet graet gant ar S.N.E.S. evit (lod a lârf e a-enep d') ar brezhoneg e Breizh ...

M'emaoc'h e-barzh an F.E.N., kemerit perzh er bodadegoù . Skrivit ivez d'an F.E.N. !

Betek-hen n'eus ket bet trouz e oa bet un tolpad bennak e Breizh . Ha graet e vo ? Pe " F.E.N. Bzh " a c'houlennno digant bodad-labour Penn-ar-bed hepken roñ e venozioù, e-giz er bloavezioù paseet ? Ma ne c'hellfemp ket sevel hor mouezh e vefe ret lakaat an holl da c'houzout e vefe bet un douelladenn ...

NOS LANGUES

La F.e.n. organise en décembre un colloque sur les langues et cultures régionales. Il sera précédé dans les semaines qui viennent de colloques régionaux. Que penser de cette initiative, alors que l'on n'a guère vu la F.e.n. sur ce terrain quand, en 1982 notamment, les conditions étaient bien meilleures pour imposer une politique réellement novatrice dans ce domaine ?

Le prochain colloque de la F.e.n. pourrait présenter les problèmes autrement.

Des mesures positives ont en effet été prises par A. Savary : circulaire de 1982, examen d'aptitude pédagogique, conseil national des langues et cultures régionales, etc. Mais

US. - n° 144 - 18/9/1986

J.P., Lille (59)

J'ai lu avec beaucoup d'intérêt l'article de Louis Weber consacré aux langues de France (n° 144). Cet article concis, mais clair et intelligent a su éviter les inepties habituellement émises à propos de ce problème en se plaçant sur le terrain de l'exigence démocratique d'égalité des cultures et de leur droit à la vie. Comme l'écrit Robert Lafont dans son dernier ouvrage « Le Dénouement français » (Éditions Suger-1985) : « La vérité d'une nouvelle démocratie française se joue dès maintenant autour de la reconnaissance ou non, au basque, au breton, à l'occitan, etc., du droit à la parole sociale illimitée. » L'homme n'a pas ses racines dans l'enclos des morts, mais dans l'histoire.

Sur un plan plus étroitement professionnel, cet article pose en creux le droit à mutation des enseignants, droit brutalement remis en cause par René Monory. En effet, une telle position implique logiquement que soit prise en compte l'académie d'origine par le biais d'une bonification sensible et ce, dans le cadre d'un mouvement national et unifié des personnels. Ainsi seraient conciliés droit au pays et péréquation nationale des moyens.

U.S. n° 145 -
02/10/1986

MA LANGUE
MATERNELLE

R.T., Guéret (23)

J'ai été très intéressé par votre article sur les langues régionales (U.s. 144, 18 sept., pp. 6 et 7). Et ce à plusieurs titres. D'abord parce que l'occitan est ma langue maternelle et que je la défends de mon mieux en écrivant des articles et des livres.

Ensuite, parce que, en tant qu'enseignant d'italien (langue rare), j'ai pensé qu'il me serait utile de me préparer à une bivalence (qui existe déjà pour nous !) et que j'ai donc passé des u.v. de niçois et de provençal.

Or, me voici : bi-admissible ; auteur d'articles pour une revue niçoise ; président d'une association niçoise d'édition, mais loin de Nice et de la Provence, et encore je suis en terre occitane ! ; titulaire académique ; en poste sur trois établissements.

Je connais des collègues se trouvant dans une situation semblable, qui, eux, sont dans le Nord ou dans l'Est (où on ne doit pas beaucoup parler occitan).

A quoi bon engranger des titres universitaires, si l'on nous place ensuite dans des conditions où il nous est impossible de les utiliser ?

En espérant que les autres défenseurs des langues régionales réagiront aussi contre cet état de choses, je vous adresse mes amitiés syndicales.

la loi promise n'a jamais été soumise au Parlement. Avec J.-P. Chevènement, ce fut rapidement le retour à une conception plus étroite de la culture et l'application des mesures prises n'a plus été encouragée.

Revenue au pouvoir, la droite semble montrer une sollicitude toute nouvelle pour les langues régionales. Elle ne saurait faire oublier ni sa responsabilité historique dans leur marginalisation, ni les méfaits de sa politique culturelle aujourd'hui.

Dès après la révolution de 1789, les milieux conservateurs ont en effet utilisé l'aspiration réelle à l'unité et à l'identité nationale pour leur plus grand profit. L'unification linguistique et culturelle du pays servaient les desseins d'une bourgeoisie qui avait besoin d'unifier le marché en général et le marché du travail en particulier. L'école de la III^e République n'a pas échappé à cette contradiction : la généralisation de l'alphabétisation en français a permis une élévation importante du niveau culturel de la population et par là même a été l'objet d'un large consensus, tout en contribuant fortement à appauvrir la diversité linguistique et culturelle du pays.

Aujourd'hui, la droite rejette le cadre national. Mais elle cherche aussi à disloquer davantage encore le substrat économique et social des langues régionales. La référence à « la chance pour la France » qu'elles constitueraient va donc de pair avec le recul accepté du français comme langue internationale, les préférences données aux sous-produits culturels dominés par le modèle américain, préférences élargies par les mesures prises pour l'audiovisuel, la ségrégation plus grande dans l'accès à la culture. Toutes choses qui vont aussi à l'encontre de l'épanouissement des richesses linguistiques et culturelles du pays dans leur diversité.

En retour, l'émergence du fait régional et la recherche d'une identité spécifique, y compris linguistique, qui l'accompagne donnent un contenu plus riche à l'identité nationale et constituent une force de résistance contre les méfaits de la politique économique et sociale actuelle. C'est vrai même si cette prise de conscience reste socialement limitée et n'empêche pas toujours la régression de l'usage des langues régionales.


D'où l'importance, pour le pays tout entier, d'une réorientation en profondeur du processus qui a conduit à minorer les langues régionales et, accessoirement, à éloigner l'école de l'environnement culturel, familial et régional de beaucoup de jeunes.

Est-ce dans cette voie que s'engage la F.e.n. en organisant son colloque ? A lire les textes de présentation parus dans F.e.n.-hebdo, la réponse est négative. Ils rassem-

blent certes des informations utiles mais l'auteur en reste au stade de la description, sans pouvoir éviter ni le recours un peu cynique à la « nécessité historique » — vous vous plaignez mais n'était-ce pas pour votre bien ? — ni la référence à une conception conservatrice de la culture la réduisant à être un patrimoine et non une création permanente dans tous les champs de l'activité sociale.

Pour que les colloques annoncés aillent plus loin, il faut donc faire prévaloir une autre approche. Dès 1977, nous avons défini des positions et des revendications qui restent valables. On ne peut dissocier l'épanouissement des spécificités régionales d'une politique de développement des régions qui assurent à leurs habitants des conditions de vie et de travail telles qu'elles peuvent être légitimement exigées aujourd'hui. Un enseignement authentique des langues et cultures régionales, à tous les niveaux du cursus scolaire est un élément important de ce développement. Il implique toute une série de mesures d'organisation et la formation de maîtres qualifiés. Il doit être accompagné de dispositions diverses concernant l'audiovisuel, la création et la diffusion culturelles, etc. Agir pour cela, sans paternalisme, c'est enrichir nos demandes relatives à la qualité des formations dispensées par le service public, c'est répondre aussi à des besoins et des attentes de bien des jeunes et de leurs familles. En disant cela nous ne tombons pas dans la nostalgie, ne sacrifions pas à quelque exotisme mais regardons résolument vers l'avenir.

LOUIS WEBER



L'enseignement des langues et cultures régionales : il faut un nouvel éclairage.

1 - KENLABOURERIEN NEVEZ

Pa oa bet krouet emsav Diwan e oa bet lakaet da bal reiñ tro d'ar Vreizhiz yaouank da vezañ kenteliet e brezhoneg azalek ar skol-vamm betek ar skol-veur.

Gant krouidigezh ar skolioù kentañ derez goude ar skolioù-mamm ez eur aet ur c'hammed war-raok davet ar pal.

Digoridigezh ur skolaj e vo an eil kammed. Setu ar pezh a vo graet e miz Gwengolo 1987.

Ac'hann di ez eus, muioc'h eget biskoazh, ezhomm da gompezañ an dachenn. War an dachenn bedagogel an hini emañ ar muiañ d'ober. Ret eo sevel an holl vinvioù skol, an holl fichenoù labour, an holl zornlevrioù o devo ezhomm ar skolidi hag o c'helennerien. Prederiañ a zo d'ober ivez war an hentennoù kelenn. N'eo ket ebat henn ober rak war ur fraostaj emamp aze evit danvezoù zo.

Evit kas an dezo-mañ da benn vat eo bet savet Bodadoù Labour an Eil Derezh gant Diwan. Dek a zo anezho, unan evit pep danvez skol : 1 - Brezhoneg, 2 - Galleg, 3 - Saozneg, 4 - Istor ha Geografiezh, 5 - Matematik, 6 - Teknologiezh ha labour-dorn, 7 - Skiantoù an natur, 8 - Arzoù, 9 - Sport, 10 - Urzhiataerezh.

Roll ar bodadoù-mañ eo sevel, e brezhoneg, an danvez skol a vo implijet da c'houde gant kelennerien ar skolaj. Ur g-Kreizenn ar Geriaouiñ hag ar C'henurzhiañ a zo bet savet ivez evit keneren an holl vodadoù labour. Labour ar greizenn-mañ eo diskoulmañ ar c'huñdennoù a denn d'ar c'heriaoueg teknikel ha kempouezañ labour an holl vodadoù.

Kalz tud o deus asantet reiñ skoazell d'an embregadenn nevez-mañ. Bez emañ an holl vodadoù da vat gant ar prient danvez. Reiñ da grediñ ez eus re a dud ouzh ar stern avat a vefe lavaret ur gaou. Ezhomm ez eus a genlabourerien all c'hoazh.

C'hwi hag a zo barrek war an danvez-mañ danvez, deuit da reiñ harp da Eil Derezh Diwan. Skañvaat bec'h ar re all a reoc'h. Ho lod a zegasoc'h evel-se e savidigezh ur skol evit hor bugale a vimp ni mestr warni. Skolioù Diwan, war eeun ha dre al levezon a c'hall o doare kelenn divyezhek kaout war ar skolioù "ofisiel" publik pe brevez, emañ stag outo tonkad hor yezh.

2 - UR POST LABOUR

Bodadoù labour an Eil Derezh eo a sav danvez : fardañ kaer ar fichenoù labour hag an dornlevrioù skol n'eo ket o roll avat (pe n'o devo ket amzer). Abalamour da se emañ Diwan o klask un den da labourat war ur post "sekretour an Eil Derezh".

a - Bez e ranko hemañ gouzout skriverezañ mat hag aozañ dielloù en un doare kempenn (E Treglonou eo e vo tennet ar c'hentelioù war ar mekanikoù fotokopiañ a ze eoc).

b - Ret e vo dezhañ bezañ ur brezhoneger ampart ivez rak ouzhpenn skriverezañ kentelioù bet savet gant ar bodadoù labour en devo d'ober : harpañ a ray ar bodadoù-mañ ivez en ur dreiñ levrioù zo gant sikour ar geriaouegoù teknikel bet savet ganto.

b - Labourioù all a c'hall bezañ fiziet ennañ : sevel Kartennoù pe tresadoù, tennañ diapositivoù diwar dielloù hag all...

Lukian KERGOAT


Rener pedagogel Eil Derezh Diwan

G.S. : Evit dont da genlabourer skrivañ da Eil Derezh Diwan 29214 TREGLOU. Lavaret war peseurt danvez e fell deoc'h degas skoazell. Skrivañ d'ar memes chomlec'h evit ar post labour.



**KREIZENN
BREZHONEGERIEN
ROAZON**
 hag ar re all !
 20, stradaed Echange :
 adalek 6 eur noz .

"AMZER 'ZO"



(Arzet diwar "levez lagaffe" gant FRANQUIN - 1952)

Ar bajenn-mañ a oa bet ankouet lakaat en niverenn 10 gant displegadennou kelenn Lukian KERGCAT.

PERAK AOZAN STAJOU BREZHONEG EVIT AL LISEIDI ?

Gant J. Y. LAGALEG

Moarvat e vo kavet ar goulenn-se goullo a-walc'h gant lod. Bez ez eus koulskoude izili eus an Unvaniezh n'eo ^{ket} nat ar respont dezho. Displegomp neuze, berr-ha-berr, ar pezh a vez degaset d'ar grenarded gant ar stajoù-se.

1- Dispartiañ ar yezh diouzh an danvez-kelenn :

Ar brezhoneg, evit hor skolidi, zo un danvez a vez kinniget dezho e-touez meur a hini all ha bez e vezont gant ar c'helenner brezhoneg goude bezañ bet gant ur c'helenner istor pe a-raok mont da selaou ar c'helenner galleg. Darn anezho n'o devez darempred all ebet gant ar brezhoneg zoken. Setu perak e ranker dispartiañ ar brezhoneg diouzh ar skol en o spered.

E Treglonou e c'hallont kejañ gant ar re a labour e savadur Diwan hag a ra gant ar brezhoneg war o zachenn labour. Bez o devez tro d'ober anaoudegezh ivez gant tud eus ar vro a gomz brezhoneg bemdez.

2- Bevañ ha komz en un endro brezhoneger :

Daoust d'an diforc'hioù a vez atav etre ar re a oar ar muiañ hag ar re n'emaint ken o kregiñ e teuer a-benn d'implij ar brezhoneg mat a-walc'h e diavaez ar c'hentelioù e-pad eizhtez. Un tammig tenn e vez evit ar re n'ouzont ket kalz a vrezhoneg. Met talvoudus e vez evit an holl koulskoude hag evit al liseidi desketañ, dreist-holl, a zeu da verzout, e-doug ar staj, int gouest d'ober gant ar brezhoneg er vuhez pemdez ha neket e rouedad an darempredoù-kelenn hepken. Hag ur wech bet aet e-biou ar skoilh-se n'o devez ket aon ken da vont e brezhoneg gant tud all e lec'h pe lec'h.

3- Kejañ gant yaouankizoù all zo teskiñ brezhoneg evêlto :

Gwelout a reont evel-se n'emaint ket o-unan o teskiñ brezhoneg. Bez e c'hallont merzout a-hend-all n'eo ket ar re gozh hepken, a gomz hor yezh.

4- Delc'her da zeskiñ ha prientiñ ar vachelouriezh :

Talvezout a ra ar stajoù-se ivez da welet en-dro ar pezh zo bet studiet e-pad ul lodenn vat eus ar bloavezh-skol, da zegas a-wechoù d'ar berzhidi displegadennoù disheñvel diouzh ar re zo bet roet dezho gant o c'helenner, da glokaat traoù zo pe c'hoazh da vont donoc'h er c'hraf-mañ-kraf. Kement-se a ro dorn eveljust d'ar re zo er c'hlas diwezhañ, hag a dremeno un tammig goude an amproenn vrezhoneg, evit prientiñ gwelloc'h o arnodenn.

Setu perak eo a-bouez bras, evit an Unvaniezh, delc'her da aozañ ar stajoù-se. Ar bloavezh-skol-mañ e vo savet ur staj ganecomp c'hoazh e Caled Diwan Treglonou, e-pad vakañsoù Pask, eus al lun 13 d'ar sadorn 18 a viz Ebrel.

Klask zo, ar bloaz-mañ c'hoazh eveljust, war meur a gelenner evit kas ar staj-se en-dro. Gallout a reer kinnig e anv, adal bremañ, evit kelenn er staj.

RENTAN-KONT AR VODADEG VEUR

Ne oamp ket gwall niverus oc'h en em garout e Rostren, d'ar 7 a viz Even. Meur a dra a oa d'an deiz-se, amañ hag ahont. Ur bern prokulou (un tregont bennak) a oa bet kaset dimp koulskoude, pezh a ziskouez n'eo ket diseblant ar gelennerien e-keñver an Unvaniezh. Talvoudus eo bet an devezh labour - d'hor soñj - even hen distkouez ar mennadoù ho peus bet tro da lenn war ar c'hannadig diwezhañ (n^o 10).

Goude rentañ-kont ar Prezidant war ar bloavezh tremenet, an teñsorier en deus displeget dimp stad madig a-walc'h ar c'hef daoust da zigresk an izili ar bloaz-mañ (dek nebeutoc'h eget warlene): Kasit diouzhtu ho fichenn ezel hag ho skodenn (50,00 lur) da v Mark Kerrain, 50 ar Mailh, 35000 ROAZON.

Kroget eo bet gant ar stourm evit an D.E.U.A. (lizher P. Denez da gannidi Breizh; lizhiri T. Kalvez d'an Ae. Bourges ha d'ar guzulerien rannvro; goulennadeg kaset d'an danrez-kuzulerien en ar-raok...) ha se a c'hellfe bezañ ger-stur ar bloavezhad stourm-mañ. Soñjet hon eus e vefe mat prientiñ un teuliad da vezañ kaset d'an dud dregarg evel ma oa bet graet evit ar CHAPES.

... /

Da gas en-dro da Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg, An Douarenn, 21 straed an Tiez-Barn 56000 GWENED.

ANV :

CHOMLEC'H :

NIVERENN BELLGOMZ :

Dont a rin da gelenn er staj a vo aozet gant an Unvaniezh e-pad vakañsoù Pask.

Y. D. Robin a zisplege d'imp en un doare resis ha sklaer stad an traoù er c'hentañ derez e-barzh an skolioù laik. Degemeret e voe an darn vuiañ eus e ginnigoù gant ar vodad (sellout ouzh Mennad I)*.

Maloù Jestin a rae kemend-all evit ar c'hentañ derez er skolioù prevez. Evit an eil derez, gant ar berrig ma en em gave an endervezh e-keñver ar roll-labour, Mikael Madeg a gave gwelloc'h aliañ an dud da lenn rentañ-kont an enklask graet e Bro-Leon "Un constat sévère sur l'enseignement du Breton dans le Géron" (Pobl Vreizh, n° 268, Ebrel 1986; kaset e vo da cemenhini hen goulenn).
Tud ar Burev evit ar bloavezh '20 o kregiñ a zo :

: Anna Ar Beg, Padrig An Habask, Tugdual Kalvez, Mark Kerrain, Per Denez, Beatri's Souin, Yann-Glaod Morvan, Jo Rio, Ronan Tremel.

Yann Glaod MORVAN

sekretour.

* Embannet e oa het ar mennadur en Niv. 10

UNVANIEZH AR GELENNERIEH BREZHONEG

UR GEVREHIGEREH OBERIANT

ECIAÑ a ra kelennerien brezhoneg

eus pemp departament Breizh
eus Bro-C'Hall (Pariz, Laval, h.a....)
eus ar skolioù-stad
eus ar skolioù prevez
eus ar c'hentañ hag an eil derez
eus ar skolioù meur
eus skolioù Diwan
eus skol dre lizher Ober.

DIFENNET he deus KELENNERIEH a oa o vont da goll

o fost brezhoneg
o eurvezhioù skol vrezhoneg
o skolidi

n'o deze eiler ebet pa oant klañv
pe o c'hortoz bugale
H.a....

SKOLIDI a veze nac'het oute dibab brezhoneg
evel danvez-studi
evel danvez-arnodenn

a veze tennet digante
o eurvezhioù skol vrezhoneg
o c'helenner brezhoneg

KLEMM he deus graet ha kaset rekedoù (3) da lezvarn ar velestradurezh
(n'int ket bet barnet c'hoazh)

AOZAN a ra devezhioù-studi evit kelennerien (e miz C'hwevrer)
evit skolidi-lise (da Bask)

KENLABOURAT a ra gant KEAV evit ar c'hamp-hañv
gant KELACUENN evit ar c'hentelioù war Minitel
gant DIWAN evit sevel ar skol vrezhoneg eil derez
gant DASTUM evit embann kasedigoù
gant an OALEDOU SEVENADUREL evit ar c'hentelioù-noz
gant KEVREDIGEZH AR GELENNERIEH BREZHONEG e Bro Bariz, h.a.

EMBANN a ra ur c'hannadig evit an izili
traktoù evit brudañ ar brezhoneg evel danvez-studi
levrioù-skol ha kasedigoù

EZEL eo eus Comité pour L'unité Administrative de la Bretagne (CUAB)
Union du Pays Rennais des Associations Bretonnes (UPRAB)
Kenurzhierzh Sevenadurel Breizh.

DAREMREDIN a ra sozadurioù etrevroadel

- The European Bureau for Lesser Used Languages
- The International Committee for the Defence of the Breton Language
- Skrif-Celt

SKRIVAN he deus bet tro d'ober

da Brezidant ar Republik
d'ar C'hentañ Ministr
da Viniatred an Deskadurezh, ar Sevenadur, ar Justis
da holl Gannaded ar 5 departament
da Guzulierien rannvro an daou guzul rannvro
da Guzulierien departamantoù Breizh
d'an holl gazetenoù breizhat, an tiez skingomz
ha skinwel rannvro
da Rektored akademizhioù Breizh
da 5 enseller Akademiezh Breizh
da Renerien Eskopti ar skolioù prevez e Breizh
da Lezvarn ar Velestradurezh e Roazhon.